

Kemenn a beoc'h hag a youl vat yaouankiz Kembre da yaouankiz ar bed 2015

Kenavo politikerien vouzar, perc'henned lontek, godelloù goullo. Kenavo kozh bed skuizh, mont a raimp war-zu warc'hoazh hon dremmwelioù. Warc'hoazh e vo leun hor godelloù, e vo deomp ar vro, warc'hoazh ez eo ni a raio al lezennoù.

Hiziv avat, e-bourzh hor Mimosa, kadarn en hon oberoù, hon eus ur veaj hir d'ober ha kalz a zaeoù da dalañ outo. Talañ a raimp ouzh ar c'hleñved, e-kreiz ar gorventenn e kensammimp ar bec'h war gein ar gazeg c'hlas.

Pa vimp o talañ ouzh hon aonoù, daoust ha cheñch a raimp hon dremmoù ha gwelet un estren e melezour an douar nevez ? Pa lakaimp hon treid war an traezh ha pa analimp an aer nevez, ha soñj hor bo eus hon hunvre p'hor boa kollet pep spi ? Ha gwelet a raimp tud ar vro evel ma welomp ac'hanomp-ni hon-unan ? Ha kinnig a raimp ur stard daouarn leun a spi ? Ha goulenn groñs hor frankiz a raimp hep kemer frankiz ar re all ? Ha sevel a raimp tiez da ginnig goudor d'ar re n'o deus ti ebet ? Ha rannañ a raimp frouezh hon douaroù frouezhus ? Ha gallout a raimp kenvevañ ha kaout doujañs an eil ouzh egile ?

Gant Kembre hon deizioù dec'h en hor c'halonoù, hiziv ez empentomp ur Gembre nevez en hor soñjoù, evit he sevel gwelloc'h warc'hoazh.

Bet savet gant skolidi Ysgol Gyfun Cwm Rhymni